

1076

N° 2

Soniou T

EVID AR B

Priz : 2 wennek.

DISPUT

etre ar Gwin, ar Jistr, ar Bier hag
ar Chufere.

WAR DON KANTIK : Jezuz pegen braz eo.

Ar Gwin.

Sonjet pegen braz è,
Plijadur an ene,
Oc'h eva deuz an noz,
Eur voutaillad gwin koz,
Pa ve kriz an amzer,
Hag an erc'h dre an er.

Ar Jistr.

Te gomz a voutaillad,
O Gwin, ma c'hamarad,
Mez me ive, potr kez,
Ve stoufet aliez,
Eur voutaillad jistr pur,
A zo mad m'hen asur!

Ar Gwin.

Me zo bet invariantet,
Ebarz deraou (1) ar bed;
Noë koz, te oar mad,
A zougaz en e brad,
Ken dous planten rêzin,
Ma 'n em vevaz lirzin.

Ar Jistr.

Te gomz a rêzin c'houek,
Mez daoust m'è braz da vek,
Te oar e oa, gwechall,
Anveet an aval!

Eur bannac'h jistr ra vad,
Pa ver o labourat,
Ha da zibri ar pred,
N'euz ket gwelloc'h, me gred.
Ouspenn, 'barz en boutaill,
Me a lamm hag a zaill.

Ar Gwin.

Pa vez 'barz en boutaill,
Te a lamm hag a zaill,
Mez gwin-champagn, assùr,
A lamm beteg ar vùr!
Kaër ez po d'in kontest,
Ma mignon, n'out ket gouest!

Ar Bier.

Petra a glevan-me ?
Eur chikan marteze
Hag a droo da fall,
Mar ned an da ziwall,
Hola ! Jistr ha gwin koz,
Fachet oc'h, ma malloz ?

Fachet oc'h, daou vignon,
Hag en deun ho kalon,
E tic'hoan kasoni,
E kichen jalouzi,
Silaouet ar Bier,
A lar d'ac'h hoc'h affer.

Te, Gwin, a gred penoz
N'euz netra med gwin koz !
Koulskoude out poufer,
Rag kemend gwin ever
Siwaz, en de hirio,

Ar Taldir

AR BOBL

Priz : 2 wennek.

Eur bannac'h jistr ra vad,
Pa ver o labourat,
Ha da zibri ar pred,
N'euz ket gwelloc'h, me gred.
Ouspenn, 'barz en boutaill,
Me a lamm hag a zaill.

Ar Gwin.

Pa vez 'barz en boutaill,
Te a lamm hag a zaill,
Mez gwin-champagn, assùr,
A lamm beteg ar vur !
Kaër ez po d'in kontest,
Ma mignon, n'out ket gouest !

Ar Bier.

Petra a glevan-me ?
Eur chikan marteze
Hag a droo da fall,
Mar ned an da ziwall.
Hola ! Jistr ha gwin koz,
Fachet oc'h, ma malloz ?

Fachet oc'h, daou vignon,
Hag en deun ho kalon,
E tic'hoan kasoni,
E kichen jalouzi.
Silaouet ar Bier,
A lar d'ac'h hoc'h affer.

Te, Gwin, a gred penoz
N'euz netra med gwin koz !
Koulskoude out poufer,
Rag kemend gwin ever
Siwaz, an da birio

Amzer genta ar bed
Me a vije evet !
En prejou peb roue
Na oa med Chufere.
Ar Vreiziz a galon
A gare ma boëson.

Ar Varzed, au Drouizien,
Koulz hag ar Varc'heien
A istime meurbed
An Dourvel alaouret.
Ganin oa meventi
Hep chikaniou na si.

Goude eva Dourvel.
E santed o c'henel
Sonjezonou dispar
Ha hunvreoù a c'hloar...
Siwaz, dilezet on,
Ar gernez warhanon !

Ar Bier.

Hallo, kamaraded,
Eun akord a vo gret :
Ar Gwin d'an Aotrone,
D'ar Varzed, Chufere,
Ar Jistr, en holl dier,
Hag en davarn, Bier !

KANAOUEN AR REPUBLIKANED GWENN

Mez me ive, potr kez,
Ve stouflet aliez,
Eur voutaillad jistr pur,
A zo mad m'hen asur!

Ar Gwin.

Me zo bet invariant,
Ebarz deraou (1) ar bed;
Noë koz, te oar mad
A zougaz en e brad,
Ken dous planten rêzin,
Ma 'n em vevaz lirzin.

Ar Jistr.

Te gomz a rêzin c'houek,
Mez daoust m'ê braz da vek,
Te oar e oa, gwechall,
Anveet an aval!
En Baradoz an Douar,
Oa avalou, hep mar!

Ar Gwin.

Avalou oa, Ian goz,
Mez barz ar Baradoz,
N'euz ket mennek a jistr,
Kleo ze hep bea trist.
Me eo mestr peb boëson,
Me ra vad d'ar galon.

Ar Jistr.

Te ra va d'ar galon,
Mez te zo eur poëzon;
Eva jistr a c'haller,
Hep aoun da zond rouler,
Ar Sant braz Gwennole,
Eve jistr 'pad an de!

Ar Gwin.

Sell! Barz en bro ar gwin,
An dud zo holl lirzin,
Bepred e vent eürus,
Hag o spered joaüs,
Eno na weler ket,
Bizachou ankeniet.

Ar Jistr.

Sell! En bro ar jistr pur,
An dud a zo tud fur,
Tud kaled ha gwirion,
Hag ampart o c'halon,
Ar jistr a lak joaüs,
Sur mad, koulz ha gwin ruz!

Ar Gwin.

Kaër ac'h euz, o Ian gez
N'out mad 'med war ar mez!
E-lec'h me ve laket,
War daoliou ar brinsed,
Hag er festou hep fin,
Na ve lonket 'med gwin.

Ar Jistr.

Gant ar paour 'on karet,
Gant ar c'houer enoret!
Ha me a istim ze
Koulz ha taol eur roue.
Mez n'ez ket da gredi,
On mad da daol' er pri!

Hag a droo da fall,
Mar ned an da ziwall.
Hola! Jistr ha gwin koz,
Fachet oc'h, ma malloz?

Fachet oc'h, daou vignon,
Hag en deun ho kalon,
E tic'hoan kasoni,
E kichen jalouzi.
Silaouet ar Bier,
A lar d'ac'h hoc'h affer.

Te, Gwin, a gred penoz
N'euz netra 'med gwin koz!
Koulskoude out pouter,
Rag kemend gwin ever
Siwaz, en de hirio,
Zo eur poëzon garo.

Sur war dek boutaillad,
Ne n'euz ket unan mad,
Laket e ve enné
Beb sort louzou neve.
Hag a ro liou gwin gall
Da goz evachou fall.

Ha te, Jistr, a lavar
Out koz war an douar,
Ha dreze, e fell d'id
Iafe ar maout ganid!
Mez te oar, mignon flour,
Ve ennout hanter zour!

Vid leunia'r varriken
Ve laket dour feunten!
Ha brema vo taolet
Muioe'h vid n'euz bet gret
Pegwir ar verjeou
N'o deuz ken avalou.

Vid achui ar gont
Ar Bier eo ar Iontr!
En hostaleriou Breiz
Ar Bier, war ma feiz,
A drec'h war ar gwin gwen
Ha war ar Jistr melen.

Rag me zo marc'had-mad
Eva ma boutaillad,
Evel champagn me vous
Evel jistr me zo dous!
N'on ket eur boëson fall
Na rentan ket meo dall.

Ar Chufere (a dremenn dre eno).

Aotrone vraz ha kre
Me eo ar chufere,
Eur paour keaz boëson koz
Zo dilezet henoz,
Ha na ve ken evet
En neblec'h dre ar bed.

Me am meuz ho klevet
O konta gant aked
Divarbenn ho kozni
Ho c'hoant hag ho parti.
Hogen, respet d'eoc'h,
An Dourvel zo kosoe'h.

Hag a droo da fall,
Mar ned an da ziwall.
Hola ! Jistr ha gwin koz,
Fachet oc'h, ma malloz ?

Fachet oc'h, daou vignon,
Hag en deun ho kalon,
E tic'hoan kasoni,
E kichen jalouzi.
Silaouet ar Bier,
A lar d'ac'h hoc'h affer.

Te, Gwin, a gred penoz
N'euz netra med gwin koz !
Koulskoude out poufer,
Rag kemend gwin ever
Siwaz, en de hirio,
Zo eur poëzon garo.

Sur war dek boutaillad,
Ne n'euz ket unan mad,
Laket e ve enné
Beb sort louzou neve.
Hag a ro liou gwin gall
Da goz evachou fall.

Ha te, Jistr, a lavar
Out koz war an douar,
Ha dreze, e fell d'id
Iafe ar maout ganid !
Mez te oar, mignon flour,
Ve ennout hanter zour !

Vid leunia'r varriken
Ve laket dour feunten !
Ha brema vo taolet
Muioe'h vid n'euz bet gret
Pegwir ar verjeou
N'o deuz ken avalou.

Vid achui ar gont
Ar Bier eo ar Iontr !
En hostaleriou Breiz
Ar Bier, war ma feiz,
A drec'h war ar gwin gwen
Ha war ar Jistr melen.

Rag me zo marc'had-mad
Eva ma boutaillad,
Evel champagn me vous
Evel jistr me zo dous !
N'on ket eur boëson fall
Na rentan ket meo dall.

Ar Chufere (a dremenn dre eno).

Aotrone vraz ha kre
Me eo ar chufere,
Eur paour keaz boëson koz
Zo dilezet henoz,
Ha na ve ken evet
En neblec'h dre ar bed.

Me am meuz ho klevet
O konta gant aked
Divarbenn ho kozni
Ho c'hoant hag ho parti.
Hogen, respet d'eoc'h,
An Dourvel zo kosoe'h.

Ar Bier.

Hallo, kamaraded,
Eun akord a vo gret :
Ar Gwin d'an Aotrone,
D'ar Varzed, Chufere,
Ar Jistr, en holl dier,
Hag en davarn, Bier !

KANAOUEN AR REPUBLIKANED GWENN

WAR DON : *Er Finister ez oun bet ganet.*

I

Arru eo ar c'houlz braz da zével
Hon bro en he enor gwechall,
Ha da lakaat kontre Breiz-Izel
Ken evurus hag ar re all.
Ha vid an dra-ze
Holl dud ar c'hontre
Eur bout d'ar chas treut a zo deut er vro-mê,
War-sao paotred ar meazou
Ha paotred ar c'hearieu !

II

Stardomp an eil daouarn egile,
Hag ankouaomp an droug bet gret.
Pardonomp ar gaou, ar fallente,
Bezomp brema breudeur parfet !
Hag hon c'harante
O kreski bemde
A rei da dud Breiz feiz ha reiz a-neve,
En em garomp, Bretoned,
Bourc'hizien, paizanted !

III

Dre ar garante 'rer burzudou
Hag ar viktor a c'honeer,
Dre ar gasoni, an injuriou,
En em goller, en em grigner ;
Karomp Arvorik
Hag ar Republik,
Lezomp e greden gant peb den da bratik,
Sikouromp ar re izel,
Ma c'hellfont 'n em zével.

IV

Bevet al labourerien gwirion,
Ar re a enor o c'hontre,
Ar vicherourien eon o c'halon,
Hag a zoûj lezennou Doue !
Bevet ar frankiz,
Ar peoc'h, ar justis,
Ha peb tra, c'h eñ mad hep gwad na polis,
Ha touomp bepred difenn
Ar gwir Republik Wenn !...

V

Goulennomp ma vo ar Peoc'h o ren,
Etre kement bro zo er bed,
Evit ma c'hallo Skiant an den,
Mond war greski hep harz a-bed !
Ha miromp ato
Ebarz en hon bro
He c'hiziu karet ha spered hon zado
Bec'h war an divroidi,
Ha iou d'ar Vreizidi !

GWERZ AR C'HLEUZIΟΥ (1)

DA LAVARET

Hed da hed an hent, evel diou voger
Teo, ledan, ha braz e sav ar girzier ;
Ar girzier ken sonn hag ar c'hestell ter.

Ar c'hleuziou uhel a zo bet kleuziet
Gant rummajou tud a bell zo marvet,
Henvel ez int deuz labour jeanted.

War Breiz hed-da-hed emaint stignet c'hoaz
Evel kefnid hir ha galloudus braz,
Evel ma oant dec'h, hi a vo varc'hoaz.

Rag pa gouez euz c'horn deuz ar girzier koz
A c'holo plenen hag a zifenn roz,
Gant ar c'houer e vent savet 'benn an noz.

Eur sort nerz distourm ra da Vreiz-Izel
Derc'hel mad bepred d'ar girzier uhel
Ha pa vent risket, c'hoaz o adsevel.

Biskoaz stroll, arme, soudard, brezeller,
N'o deuz gret neblec'h labouriou ken kaër
Ha ken padus evel ma 'z eo ar girzier !

Pephini ané, mar befe brezel
Vid difenn ar vro vefe eur c'hastell
Krenvoc'h, ha suroc'h vid touriou uhel.

Boulejou, ha plom, ha mindraill treitour
A ve dic'halloud war ar girzier flour,
Dreg ar c'hleuziou mad e ver er c'hledour.

Al lann, ar balann a gresk war o c'hein,
Ar c'hoat, hag an drez hag ar boujou drein,
Hag ar gwez-dero ken kaled ha mein,

Hag a ra warné renkou kranellou
Zo zuroc'h diwall evid kastellou
Startoc'h da ziskar evid maneriou.

Ar c'hleuziou zo c'hoaz toennou hegar (2)
Pa gouez ar glao bil war greun an douar,
Pa strak an arne gant strop ha kounnar.

Ar c'hleuziou gret mad ha renket asur,
Tro ar parkeier evel peder vur,
Sellet diouto zo eur blijadur.

Pa zaofet, paotred, tier war ar roz,
Tro war dro d'ezo, evel ho tud koz,
C'houi zavo girzier kaëra ho parroz.

Ha war o c'hourre, e plantfet dero,
Hag etre ar gwez, boujou lann garo,
Eno c'hortozfet en peoc'h ar maro.

Ha war o lerc'h, c'hoaz, ar c'heuziou uhel,
Teo, ledan, ha braz vel re Breiz-Izel,
A viro ar Peoc'h... prest vid ar Brezel !!

(1) Pe ar Girzier.

(2) Toennou agreab.

KANOUEΝ IAN SOUDARD

War eun ton gallaou anavezet

Hallo, Soudard, ma mignon, lon la,
Hallo, soudard, ma mignon,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha kanomp c'hoaz eur sonen,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha...

Kanaouen ar Be...

TON : Ker Iz.

Bréma, gant o mojou neve
Aoun rag ar maro o deve !
Aoun o deuz rag ar berejou,
Na c'houllont ken gweled be...

Na fell mui d'è e vefe gret
En dro d'an iliz, ar vered.
Gwir eo neuz ken ilizou koz
Re neve flam saver fenoz !

Pell ar berejou deuz an dud,
Pell dionté an Ankou mud !
Er meaz a gear ar Re Varo,
Eur voger uhel tro war zro !

Masonit eur voger uhel
Vid na vo ken gwelet deuz pe...
Na be, nag interamantchou :
Deut eo spontik an dudigou.

Muriou na oa ket d'o diwall
En dro d'ar berejou gwechall
Na oa ket ezom muriou braz !
Ar Re Varo zo sioul, allaz.

Ar vered oa stok d'an iliz ;
Eun kekleo demeure an ofiz
A ziskenne velse bemde
Beteg an anaon en o be.

Stok d'an iliz darempredet
E vijer neuze interes,
Ha beb sul, kerent a vanden
War ar be lâre eur beden.

Brema gant o mojou neve
Aoun rag ar maro o deve !
Pell, emezint, ar berejou !
Pell deuz hon zier ar beziou !

Ar punsou don a dro war dro
Ve fall o dour 'tal Re Varo !!
(Koulskoude, pad ouspenn mil
Kreiz ar bourkou berejou oa !)

Eu de 'ta, zo bet lavaret
E vije bet dizinteret
Ar Re Varo. Gret a oa d'è
Er meaz ar bourk eur Gear ne...

Ar vered koz, eur park n'eo k
Petra lâran ? Eun tam tachen
Hep dor, distruch ; hag eur
Chomet en he c'hreiz, n'ounn p...

An dud a dremenn dre enni,
Ha zonj abed na zeu d'è mui
Penoz an douar e pleustrant
'Neuz kloset Re Varo dre gant...

Penoz eno, korfou paour noaz
'Pad mil vla a zo et da boaz ;
'Pad mil vla, eskern tud 'velté
'Deuz breinet eno, deün eur be...

Hag ar vugale dizoursi
Ha dizeblant tre, a c'hoari
War blasen ar beziou zerret
Hag an toullou koz bet stouve...

Koulskoude, 'n car wezen dere
Diwanet war demz tud varo
E klever an ineou, an noz,
O wela c'hoaz d'o beziou koz...

anaouen ar Berejou Koz

TON : Ker Iz.

Bréma, gant o mojou neve
Aoun rag ar maro o deve !
Aoun o deuz rag ar berejou,
Na e'houllont ken gweled beziou !

Na fell mui d'è e vefe gret
En dro d'an iliz, ar vered.
Gwir eo neuz ken ilizou koz,
Re neve flam saver fenoz !

Pell ar berejou deuz an dud,
Pell diontè an Ankou mud !
Er meaz a gear ar Re Varo,
Eur voger uhel tro war zro !

Masonit eur voger uhel
Vid na vo ken gwelet deuz pell
Na be, nag interamantchou :
Deut eo spontik an dudigou.

Muriou na oa ket d'o diwall
En dro d'ar berejou gwechall :
Na oa ket ezom muriou braz !
Ar Re Varo zo sioul, allaz.

Ar vered oa stok d'an iliz ;
Eun kekleo demeurez an ofiz
A ziskenne velse bemde
Beteg an anaon en o be.

Stok d'an iliz darempredet
E vije neuze intereset,
Ha beb sul, kerent a vanden
War ar be làre eur beden.

Brema gant o mojou neve
Aoun rag ar maro o deve !
Pell, emezint, ar berejou !
Pell deuz hon zier ar beziou !

Ar punsou don a dro war dro
Ve fall o dour 'tal Re Varo !!
(Koulskoude, pad ouspenn mil vla,
Kreiz ar bourkou berejou oa !)

Eu de 'ta, zo bet lavaret
E vije bet dizinteret
Ar Re Varo. Gret a oa d'è
Er meaz ar bourk eur Gear neve.

Ar vered koz, eur park n'eo ken.
Petra laran ? Eun tam tachen,
Hep dor, distruch ; hag eur groaz koz
Chomet en he c'hreiz, n'oun penoz.

An dud a dremenn dre enni,
Ha zonz abed na zeu d'è mui
Penez an douar e pleustrant
'Neuz kloset Re Varo dre gant.

Penez eno, korfou paour noaz
'Pad mil vla a zo et da boaz ;
'Pad mil vla, eskern tud 'velté
'Deuz breinet eno, deün eur be !

Hag ar vugale dizoursi
Ha dizeblant tre, a c'hoari
War blasen ar beziou zerret
Hag an toullou koz bet stouvet.

Koulskoude, 'n oar wezen dero
Diwanet war dezuz tud varo
E kléver an ineou, an noz,
O wela c'hoaz d'o beziou koz...

PETRA EO AN EMZAO BRETON ?

— Eur maread zo, lakomp pemp pe c'houec'h 'là, na weler ken ebarz journaliou ar vro nemed konta diwar-benn an Emzao breton, a lavaraz Ian da Fanch. Petra eo ze, Fanch ?

— An Emzao breton, eme Fanch goude beza rasket e c'horzaillen, a zo da laret en gallek : le mouvement breton.

Eur mouamant, Ian a c'hell beza komprenet evit traou ar spered, hag evid traou ar c'horf. Mez pa intenter kaozeal koulz deuz an eil evel deuz egile, hen galver *emzao* en brezonek c'houek. N'on ket eun den gwiziek dreist-bord, evel-kent, Ian, ec'h ouzoun mad e tarz ar gir *emzao* deuz ar verb *sevel*, ha daoust ma n'oun ket, kennebeud, mesket en parti a 'bed, e seblant ganin penaoz an emzao breton a zo gret gant eun nebeud tud kapab hag o deuz c'hoant da « adsevel » ar vro-ma, da lavaret eo Breiz, war an troad uhel e oa bet gwechall.

Evel ma lavaren d'id, kamalad Ian, an Emzao breton a zell ouz *traou ar Spered*. Labourat a rer en eur a vrema da rei d'ar Vretoned, dre o journaliou hag o c'heloennou mad, eun diskadurez hag a zigouese deuz o c'harakter hag o ene. Rag m'hen assur d'id, kenderf Ian, e roer en de a vrema eun diskamant diot d'hon bugale ebarz skoliou ar Fransizien. Na fell ket ganto na komans dre diski d'hon bugale lenn ha skriva brezonek, nag en em zikourat gant ar brezonek da erruout da anaout ar gallek. Ze zo pennkaoz e oar kennebeud ahanomp lenn, dre ma ne oar ket pennou-braz Pariz an tu d'hen diski d'emp. Paotred an Emzao a fell d'ezo e ve chenchet eur stad ken diot, hag a guzuill d'ar Vreiz-Izeliz nompaz voti nemed evid deputeed hag a ouio brezonek hag a douo diragé goulenn, ebarz ar Gambr, ma vezo chenchet al Lezen war ar Skoliou Primer.

C'hoaz a zo, mignon Ian Lagadek. An Emzao breton a blé ouz *an traou korporel*. Beb blé e ve gret gant ar sosietou anezou reunionou braz ebarz ar gear-ma pe ar gear-hont, hag ouspenn ma ve diduanant gant diskouriou ha kanaouennou ar Varzed dichek, ha gant paotred an drajediou, e ve labourer da lakaat ar c'honverz breton, ar marc'hadourezou hag al labourdouar deuz Breiz en eur renk vad hag enorus. Poania ve gret evid kroui etre Breiz-Veur ha Breiz-Vihan linennou-mor nive-rusoc'h, evid m'hon bezo ar glaou douar war-eon ha gwelloc'h marc'had, ha ma c'hallfomp kas tre di, hon fatatez, hon frodiou-liorz, hag hon loened-korn.

Dre-ze 'ta, Ian ma c'homper, pa 'zi da voti, na ro da vouez nemed da dud kapab hag a vo anat emaint a-du gant an Emzao breton !

DIVUNADENNOU

I

Dek troad ha tri benn,
Toull e rër war lein e gein ?

(Eun den war eur gazek pa vez ebeul ganti.)

II

Divun eun ankane ru,
Gant eur moué gwen hag eur rër du ?

(An tan, gant flam ha ludu.)

III

Ped lost loë deuz duze da Vene-Bre ?

(Unin, mar be hir awalc'h.)

IV

Ken Koz hag e dad ?

(Mab Ar C'hoz.)

V

KANOUEI IAN SOUDARD

War eun ton gallaou anavezet

Hallo, Soudard, ma mignon, lon la,
Hallo, soudard, ma mignon,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha kanomp c'hoaz eur sonen,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha kanomp c'hoaz eur son !

Kanomp bepred 'n eur gerzet, lon, la,
Kanomp bepred 'n eur gerzet,
Hag hon diouc'har skuizet,
A bigno c'hoaz ar grec'hen,
Hag hon diouc'har skuizet,
A zivorzo abred.

Pa ve gret al leo genta, lon, la,
Pa ve gret al leo genta,
Ar sac'h a bounnera
Hag ar c'hartoucherennou,
Ar sac'h a bounnera
War griben an diousoa.

Mez d'an eil leo ni zonjo, lon, la,
Mez d'an eil leo ni zonjo,
En hon zud zo er vro
Ha hi koz ha glac'haret,
En hon zud zo er vro
O c'hortoz hon distro.

Ha d'an derved leo brema, lon, ia,
Ha d'an derved leo brema
Ni zonjo da genta,
D'hon mestrezik dudius,
Ni zonjo da genta
D'hon mestrez ar c'hoanta.

D'ar bederved leo, zonjomp, lon, la,
D'ar bederved leo, zonjomp
Er pardonioù brudet,
Hag en holl asambleou,
Er pardonioù brudet
Lee'h hon euz bet danset.

Ha d'ar bemped leo goude, lon, la,
Ha d'ar bemped leo goude,
Ni zonjo er c'honje,
Hag er permissionou,
Ni zonjo er c'honje,
Bebet al liberte !

D'ar c'houec'hved leo ni zonjo, la,
D'ar c'houec'hved leo ni zonjo
En termen diveza
Pa vefomp dishualet,
En termen diveza,
Leusket ar vuez-ma !

D'ar seizved leo ni zonjo, lon, la,
D'ar seizved leo ni zonjo,
Barz ar renoz buan,
Rag ar zac'h zo gwall bounner,
Barz ar renoz buan,
Hag er c'hantonaman' !

Pa vemp er c'hantonaman' lon, la,
Pa vemp er c'hantonaman',
War ar plouz astennet
Ni gousko eveld aële,
War ar plouz astennet,
E-kichen al loened ! !

Ha zonj' abed na zeu d'e mil
Penez an douar e pleustrant
'Neuz kloset Re Varo dre gant.

Penez eno, korfou paour noaz
'Pad mil vla a zo et da boaz ;
'Pad mil vla, eskern tud 'velté
'Deuz breinet eno, deün eur be !

Hag ar vugale dizoursi
Ha dizeblant tre, a c'hoari
War blasen ar beziou zerret
Hag an toullou koz bet stouvet.

Koulskoude, 'n eur wezen dero
Diwanet war demz tud varo
E klever an ineou, an noz,
O wela c'hoaz d'o beziou koz...

Petra eo ar Vretoned ?

Kalz a dud en hon bro, a oar ec'h int Bretoned, mez ha gouzout a reont petra eo ar Vretoned ? Dibaot a baizant a c'hallfe respont.

Ar Vretoned, brema zo daou vil 'la bennag e vije gret ar C'helted anezo. Ar Vretoned-ze (hon zadiou koz) a oa d'ezo kement bro a zo er C'huz-Heol deuz ar bed. Ar mestrou e oant dre-holl. Neuze, brema zo naonteg kant 'la, e teuaz eun tammik koz poblantz tud hanvet Romaned an Itali, hag a zistrujuz net gouenn ar Vretoned ebarz Bro-C'hall. Ar Vretoned a oa c'hoaz galloudus braz koulskoude ebarz en Breiz-Veur (pe Bro-Saoz brema). An holl broioù ze a oa d'ezo. Pevar c'hant 'la bennag goude donedigez Jezus-Krist, bandennadou Saozon, pere oa laeron-vor, a zeuaz deuz koste ar Pruss da hegas Bretoned Breiz-Veur. E-pad daou c'hant 'la, e zo bet brezel etre al laeron-ze hag ar Vretoned. 'Benn ar fin, ar Vretoned a oë kannet, ha red d'ezo mond da guzet deuz arrach ar Saozon.

Darn a goachaz en Bro-Geumri, darn en Irland, darn en Skos, eur rumm all a zeuaz da Vreiz-Izel. Abaoue donedigez hon zadou er vro-ma, ez euz 1.200 blà.

Ar vro-ma a vije gret neuze an *Armor* anezi : hon zadou o deuz hanvet anezi : *Breiz*.

Dalc'homp sonj penaoz Breiz a zo bet eur vro gaër ha pinvidik epad 700 la, daoust d'ar brezelliou a vijé ret d'ez i ober deuz rouane Franz pere a felle gante hon huala. Dond a rechont a-benn deuz o zaol er blavez 1489. Ar Vretoned a oë pillet gant ar C'hallaoued en emgann Sant-Aubin, hag an dukez Anna a werzaz he bro en eur dimezi gant roue Bro-C'hall Charles Eizved.

N'omp Fransizien nemed 400 la zo !

Ar Vretoned o deuz bet esaet diou pe deir gwech adkavet o liberte o-hun. Bewech, an Nerz he deuz trec'het war ar Gwir.

Sethu aze traou ha na zisker ket er skolioù da vugale ar Vretoned : gouzout a ret brema perag.

PETRA EO AR BREZONEK ?

Ar Brezonek eo Iez (pe Langach) ar Vretoned abaoue komansamant ar bed. Ni a gomze Brezonek ouspenn pevar mil 'la araog ma oa difluket gir Gallek a-bed.

Ar Brezonek a zo eur iez enorabl, hag a dleomp derc'hel mad d'ez i — daoust ma 'z eo red d'emp, ha talvoudus zoken, diski ar gallek. —

Ar Brezonek a zo eur iez *pinvidik* meurbed.

Daouzek milion a dud a gomz brezonek dre ar bed : en Breiz ha Franz a zo war dro **daou vilion** diouto.

Tal
e dl
1.
2.
3.
4.
5.
6.
7.
8.
9.
10.
11.
12.
13.
14.
ze e
en e
15.
16.
17.

Penoz an douar e pleustrant
'Neuz kloset Re Varo dre gant.

Penoz eno, korfou paour noaz
'Pad mil vla a zo et da boaz ;
'Pad mil vla, eskern tud 'velté
'Deuz breinet eno, deñn eur be !

Hag ar vugale dizoursi
Ha dizeblant tre, a c'hoari
War blasen ar beziou zerret
Hag an toullou koz bet stouvet.

Koulskoude, 'n eur wezen dero
Diwanet war demz tud varo
E klever an ineou, an noz,
O wela c'hoaz d'o beziou koz...

Petra eo ar Vretoned ?

Kalz a dud en hon bro, a oar ec'h int Bretoned, mez ha
ut a reont petra eo ar Vretoned ? Dibaot a baizant a
fe respont.

Ar Vretoned, brema zo daou vil 'là bennag e vije gret ar
ted anezo. Ar Vretoned-ze (hon zadiou koz) a oa d'ezo
nt bro a zo er C'huz-Heol deuz ar bed. Ar mestrou e oant
oll. Neuze, brema zo naonteg kant 'là, e teuaz eun tammik
oblanz tud hanvet Romaned an Itali, hag a zistrujuz net
on ar Vretoned ebarz Bro-C'hall. Ar Vretoned a oa c'hoaz
adus braz koulskoude ebarz en Breiz-Veur (pe Bro-Saoz
a). An holl broiou ze a oa d'ezo. Pevar c'hant 'là bennag
e donedigez Jezus-Krist, bandennadou Saozon, pere oa
n-vor, a zeuaz deuz koste ar Pruss da hegas Bretoned
e-Veur. E-pad daou c'hant 'là, e zo bet brezel etre al laëron-
g ar Vretoned. 'Benn ar fin, ar Vretoned a oë kannet, ha
l'ezo mond da gûzet deuz arrach ar Saozon.

Darn a goachaz en Bro-Geumri, darn en Irland, darn en
eur rumm all a zeuaz da Vreiz-Izel. Abaoue donedigez
zadou er vro-ma, ez euz 1.200 blâ.

Ar vro-ma a vije gret neuze an *Arvor* anezi : hon zadou o
hanvet anezi : *Breiz*.

Dalc'homp sonj penaoz Breiz a zo bet eur vro gaër ha
dik epad 700 lâ, daoust d'ar brezelliou a vijé ret d'ezi
deuz rouane Franz pere a felle gante hon huala. Dond
chont a-benn deuz o zaol er blavez 1489. Ar Vretoned a
illet gant ar C'hallaoued en emgann Sant-Aubin, hag
ukez Anna a werzaz he bro en eur dimezi gant roue Bro-
l Charles Eizved.

N'omp Fransizien nemed 400 lâ zo !

Ar Vretoned o deuz bet esaet diou pe deir gwech adkavet
erte o-hun. Bewech, an Nerz he deuz trec'het war ar Gwir.
Sethu aze traou ha na zisker ket er skoliou da vugale ar
ned : gouzout a ret brema perag.

PETRA EO AR BREZONEK ?

Ar Brezonek eo Iez (pe Langach) ar Vretoned abaoue
nsamant ar bed. Ni a gomze Brezonek ouspenn pevar mil
aog ma oa difluket gir Gallek a-bed.

Ar Brezonek a zo eur iez enorabl, hag a dleomp derc'hel mad
— daoust ma 'z eo red d'emp, ha talvoudus zoken, diski ar

Ar Brezonek a zo eur iez *pinvidik* meurbed.

Daouzek milion a dud a gomz brezonek dre ar bed : en
ha Franz a zo war dro **daou vilion** diouto.

Dek troad ha tri benn,
Toull e rêr war lein ?

(*Eun den war eur gazek pa vez ebeul ganti.*)

II

Divun eun ankane ru,
Gant eur mouë gwen hag eur rêr du ?
(*An tan, gant flam ha ludu.*)

III

Ped lost loë deuz duze da Vene-Bre ?
(*Unin, mar be hir awal'h.*)

IV

Ken Koz hag e dad ?
(*Mab Ar C'hoz.*)

V

Me am meuz eur gamprik wen,
Zo alc'houezet en daou benn,
Ha n'euz forz petra a ri,
N'i ket e-barz hep terri.
(*Eun ui.*)

VI

Piou a ia a-souz a-dren d'e labour ?
(*Ar c'helorn.*)

VII

A lak e gig da c'holo e groc'hen ?
(*Ar bomm-douar troet.*)

TAOLET PLED MAD :

Set ama hanoiou al Levriou an neuz skrivet ar barz breizad
Taldir (Fanch Jaffrennou, deuz Karnoet, en Kerne-Uhel), hag
e dlefe peb Breton hag a oar lenn kaout anezo en e di :

- | | |
|--|------------|
| 1. — <i>Bue sant Erwan</i> | 2 gwennek. |
| 2. — <i>En tu all d'ar maro</i> , kontaden..... | 2 — |
| 3. — <i>Gwerziou Abherve ha Taldir</i> | 5 — |
| 4. — <i>Levr an Hirvoudou</i> | 8 real. |
| 5. — <i>Levr an Delen dir</i> | 8 — |
| 6. — <i>Fentigel ar Bourc'hiz lorc'hus</i> | 4 — |
| 7. — | |
| 8. — | |
| 9. — | |
| 10. — <i>Levr kenta Barzaz Taldir</i> (bet meda-
lennet)..... | 14 real. |
| 11. — <i>Trajedien Pontkallek</i> | 5 — |
| 12. — <i>Bro goz ma zadou</i> , kan lakeet e muzik.. | 5 — |
| 13. — <i>Soniou Taldir</i> , feillen 1..... | 2 wennek. |
| 14. — <i>Soniou Taldir</i> , feillen 2..... | 2 — |

Grit ar gont, hag e welfet e c'heller kaout ar 14 pez-labour-
ze evid ar priz a *Bevar skoed ha trizek gwennek*.

Eun netraik, da gont ar pezh a gaver da lenn ha da ziski
en oberou ze, bet meulet gant an holl !

Prestik c'hoaz e vezo moulet :

- | | |
|--|------------|
| 15. — <i>Fentigel ar Barz hag ar Prokuror</i> | 4 real. |
| 16. — <i>Seiz-ugent divunaden</i> | 6 gwennek. |

Ha divezatoc'h :

- | | |
|---------------------------------------|--|
| 17. — <i>Eil levr Barzaz Taldir</i> . | |
|---------------------------------------|--|